

Redadeg 2024 : Enlinenn emañ an Hentad

Setu un distro-skol birvidik evit Ar Redadeg pa reomp emgav deoc'h er bloavezh-skol-mañ etre ar 17 hag ar 25 a viz Mae 2024 etre Beg ar Raz ha Montroulez.

Treuzkas renerzh

Tem an treuzkas zo bet dibabet evit ar Redadeg 2024, un treuzkas diabarzh a vo ivez pa vo roet ar vazh-test gant Katelin al Lann, renerzh kentañ ar gevredigezh, o vont war he leve, da Fulup Kere, nevez-anvet war ar post. Hemañ, hag a oa rener ar gevredigezh DAO betek-henn a anavez mat an ti pa oa er Burev dibaoe meur a vloaz.

Raktresoù skoazellet

Ar bloavezh a vo karget ivez evit ar re bet dibabet o raktres gant ar re fur. 9 euliad a zo bet choazet goude bezañ bet studiet gant kuzul ar re fur. Ar c'huzul-mañ, tud diavaez Kuzul-Merañ ar gevredigezh, izili pe get, en deus da garg studiañ an teuliadoù kaset d'ar Redadeg da heul ar galv.

9 raktres a vo skoazellet gant ar Redadeg 2024 eta, ouzhpenn ar gevredigezh Diwan a vez skoazellet evit an hanter eus ar gounidoù bep taol :

Buheziñ :

- **Ti Ar Vro Kemper**, raktres Ti Ar Brug, ur greizenn dudi e brezhoneg evit ar vugale etre 3 ha 12 vloaz (10000€)
- **Brendan-Budok Durand-Le Ludec** – Echedoù e brezhoneg. Diorren an ostilhoù kelenn ha treuzkas an echedoù e brezhoneg (5000€)

Embann :

- **Timilenn** : levrioù brav evit ar vugale. Timilenn a zo staliet e Bro Naoned ha n'eo ket sikouret, na gant an departamant na gant rannvro Broioù al Liger. (5000€)
- **CPTMPK – Kleor**, levrioù da glevet e brezhoneg (3000€)
- **Distibig – Ma levr kentañ** : E ospital Montroulez, ul levrig divyezhek evit ar vugale nevez-c'hanet hag o zud. (4000€)

Mediaoù :

- **Splann !** : Evit lakaat e brezhoneg ar pennadoù enklask dre skrid ha dre podcast (15000€)
- **Skol An Emsav** : Evit embann ar c'helaouennoù Bremañ hag #Brezhoneg e stumm niverel (13000€)
- **Plum FM** evit kinnig abadennoù e gallaoueg e Bro Redon (3000€)

Choariva :

- **Teatr Piba – Va Zud-Kozh**. Ur pezh-c'hoari e brezhoneg skrivet diwar ul labour dastum kaset da benn e Brest en EPHAD Louise Leroux hag e skolioù Diwan ha divyezhek karter Rekourañs (12 000 €)

Ar gartenn en linenn

Gallout a reer bremañ gwelet an hentad a-bezh gant an eurioù tremen, hag ijinañ an doare da gemer perzh, da aozañ abadennoù... Ar gwerzh a vo digor adalek fin miz Here.

Kemer perzh

Mare an distro zo hini an dibaboù, kinnig a ra Ar Redadeg d'ar re a fell dezho kas war-raok ar brezhoneg mont davet ar skipailhoù lec'hel evit degas o barrezhioù hag o youl d'an aozadur. Tra-walc'h eo lakaat e/he anv dre al lec'hienn internet.

Redadeg 2024 : Le parcours est en ligne

La rentrée de la Redadeg est intense en cette année scolaire qui verra l'événement se dérouler du 17 au 25 mai 2024 de La Pointe du Raz à Morlaix.

Transmission à la direction de l'association

C'est le thème de la transmission qui a été choisi pour la Redadeg 2024. Il sera aussi question de transmission en interne puisque Katelin al Lann, première directrice de l'association fait valoir ses droits à la retraite et transmet le flambeau à Fulup Kere. Celui-ci, précédemment directeur de DAO (fédération de l'enseignement du breton aux adultes) connaît bien la maison car il était membre du bureau depuis plusieurs années.

Projets aidés.

L'année sera chargée aussi pour ceux qui ont vu leur projet choisi par le conseil des sages. 9 projets ont été retenus par les «sages». Le conseil des sages a pour mission d'étudier et de choisir les dossiers proposés suite à l'appel à projets lancé pour chaque édition. Ses membres sont extérieurs au Conseil d'Administration adhérents ou non de l'association.

9 Projets seront donc aidés par la Redadeg 2024 en plus de la fédération Diwan qui se verra remettre la moitié des bénéfices comme lors de chaque édition :

Animation :

- **Ti Ar Vro Kemper**, projet Ti Ar Brug, Un CLSH, centre de loisirs pour les enfants de 3 à 12 ans (10000€)
- **Brendan-Budok Durand-Le Ludec** – Le jeu d'échecs en breton. Développement des outils de transmission et d'apprentissage des échecs en breton (5000€)

Edition :

- **Timilenn** : De beaux livres pour les enfants. Timilenn est basée en Pays nantais et ne bénéficie d'aucun soutien du Département de Loire-Atlantique ni de la Région Pays de la Loire (5000€)
- **CPTMPK – Kleor**, Livres à écouter en breton (3000€)
- **Distibig – Ma levr kentañ** : A l'hôpital de Morlaix un livre bilingue à l'attention des nouveau-nés... Et de leurs parents. (4000€)

Médias :

- **Splann !**: Pour la publication en breton sous forme écrite et de podcast des enquêtes journalistiques (15000€)
- **Skol An Emsav** : Mise en format numérique des magazines Bremañ et #Brezhoneg (13000€)
- **Plum FM** : Emissions radio en gallo sur le pays de Redon (3000€)

Théâtre :

- **Teatr Piba – Va Zud-Kozh**. Une pièce écrite à partir d'un travail de collectages à l'EPHAD Louise Leroux (Brest) et dans les écoles Diwan et bilingues du quartier de Recouvrance. Pièce qui sera jouée dans les écoles de Bretagne. (12 000 €)

Le parcours 2024 en ligne

L'ensemble du parcours avec les horaires de passage est désormais disponible en ligne. On peut donc d'ores et déjà prévoir sa participation ou imaginer des animations. La vente de kilomètres sera ouverte fin octobre.

Participer

La rentrée est une période de bonnes résolutions. Pourquoi ne pas s'engager à la Redadeg pour ceux qui souhaitent participer à la transmission de la langue bretonne ! On peut proposer ses compétences et son énergie via le site internet.

Contact : Cyril Lelong 06 13 30 19 49 cyril@ar-redadeg.bzh



www.ar-redadeg.bzh